



88

## CANTIC

EVIT

# MISSION SANT-QUAY

Tostaet, habitantet deuz a barous Sant-Quay,  
Da sileo canan eur werz zo rimet a neve,  
Barz er blavoës mil eiz cant pevar a daou ugent,  
En miz kerdu divoëan evit rei dec'h da intent.

1844

Kent evit ma commansi da zonet d'e c'hanan,  
Habitantet ar barous, iscez a c'houlennan :  
Na deut ket da n'em choqui demeuz ar vuirione,  
Car, ma laran gevier, ma reprenit goude.

Credin a ran, Sant-Quaïs, n'oc'h ket oll ignorant  
Demeuz an amzer dremenet hac an hini bresant :  
Guech all a mamp bet chefou braz hac a oa suffisant,  
Deut zo en ho flaso tud fur ha tud prudant.

Me meuz guelet guech all, barz en parous Sant-Quay,  
Ministret d'he servijin, ha person ha cure,  
Ken a arruaz gante ar bersecution ;  
Neuze renqjont tec'hel, ha cure ha person.

Neuze teuaz en ho flas eur belec sermentour :  
N'en devoa an nep tretamant evit en em sicour,  
He bansion en devoa divar ar charite,  
Hac en deuz renket mervel en creiz ar baourante.

Neuze ho devez sonjet guerzan ho frespitor,  
Neglijan an templ santel, trahissan ho fastor,  
Sevel eun hostiliri barz en ti ar person,  
Ha lakat cas anezan en arrestation.

Ac'hane ez int commanset da zont da zistrujan,  
Ha da lezel ho iliz en danjour da coezan :  
He voa en he c'hagoni, ranverset he c'hautel,  
Digoret an tabernacl, goulouet ar sanctuer.

Chaseet e'r ministret gand chefou ignorant,  
Ho vean n'en deut ket da brestan ar sermant  
Ha dont da n'em soumetin d'ar bersecution  
Convenet gant laïket, tud hep relijion.

Var digare ma devoa eun tam autorite,  
E voa c'hoezet ho fenno gant calz a vanite,  
Ha bezan an darn vuan ane var bord bo be  
Da vezan boed d'ar preved ha da vezur ane.

Me gred he sonje gante e voant chefou immortal,  
Hac e teuje ho c'hargou d'ho ampech da vervel :  
Pa eo arruet an amzer he devez renket plegan,  
N'obstant d'ho autorite, coulz hac an disteran.

Alies, e leverer d'imp er proverb ancien,  
E c'haru an eil amzer evit paean eben,  
Ha gant ar memez goalen ma skofomp hon nissan,  
Ez eo just ha rezonabl dont ive d'hon paean.

Tristan situation evidoc'h, ma zud kez,  
N'a po ket an ofern bred en ho c'hiliz parez,  
Nemert hepken an devez ma vezo ar pardon,  
E teu eur belec d'he laret deuz ar barous canton.

An dud coz hac ancien a renke chom er gêr,  
Hac ar vugale iaouank, da laret ho *Fater* ;  
Gant an incabacite hac an eloignamant  
E teu calz da n'em iena ha da vean neglijant.

Neuze e vije ret deze mont da Berros-Guirec  
Da vadei, da eureuji ha da vezan interret ;  
Ha pa vije tud clan en danjour ar maro,  
Ac'hane e vije digaset de ar sacramancho.

Alafin an otro m'ér, Ian ar Goïc hanvet,  
Nevez galvet tud he barous evit en em glevet,  
Da glasq cat ar voyen da gavet eur person,  
N'eur sevel eur somm arc'hant evit e bansion.

En eur voez e deuz laret ho dije eur belec,  
Coustje da coustje, m'ar bije gallet caet ;  
Pel a zo deus a amzer ez omp hep eur pastor,  
Poent eo dimp couscoude repari an henor.

Er paroujou all partout e voeler ministret,  
Ha nin a zo o vevan evel uganodet ;  
Mar keromp en em sicour peb hini en he ez,  
A barz neubet amzer e mezomp ofern bred.

An otro an Escop var ze en em gavo contant,  
Mar paeomp ar bansion da c'hortos tretamant ;  
Car deuz ar gouarnamant e tepan kement-ze.  
Na c'heuz mert clasq unan, me ro dec'h ma c'honje.

Habitantet Sant-Quay, caeran gras a c'heuz bet  
Da gaet evit pastor an otro ar Boajet ;  
Pedet Doue d'hen conserv ma chomo en yec'het,  
Car he a zo eur pastor hac a gar he zevet.

Me gret e gant Doue ez eo predestinet :  
Deuz a guement a c'houlén na ve ket refuset,  
Betec an dud pinvidic demeus ar c'hontre,  
A accord dezan kement a c'houlén digante.

Bet en deuz permission da gresqui ar veret  
Var an dachen guer a font d'an itron ar Bozec,  
Eur vreg fur ha prudant ha leun a charite,  
Gras ma vezo recompanset gant an otro Doue.

Calz demuez coat an iliz en deveuz a bresant  
Digant ar fondatour demuez a Keringant ;  
Pedomp Doue evit ma c'heomp da repos,  
Entouez ar Sent, an Elez, er gloar ar Baradoz.

Savet a zo bet tri cloc'h en clochet an iliz,  
Da hervel ar gristenien da donet d'an offiz,  
Unan bian, unan cren hac unan braz,  
Evit son an *Angelus* hac evit son ar glaz.

Ornet en deveuz anezi evel eun admiration,  
Ha savet he oterio, ha bet eur govizion ;  
Prenet en deveuz eur soleil, calei ha platinen,  
Ornamancho neceser vit laret an ofern.

Savet eur litrin neve, vesperant, graduel,  
Groet panko klos en iliz evit an dud fidel ;  
Bet en deuz lamp a croajo hac eur gador sermon,  
Pel a zo n'en doa hini evit ober he brôn.

Pa finisaz ar retred, en devez divezan,  
E voa eun drue guelet ar bobl paour o velan,  
Beuet en ho daero ha mantret ho c'halon,  
O tougen ar relego en traon ar procesion.

Galloud a ellomp sonjal gant queun ha gant glac'har,  
Marteze ar relegou pere gasomp d'an douar,  
A voa d'hon zud, d'hon mam, breuder pe c'hoarezet,  
Da vugale amezeien, da gerent pe d'hon fried.

Ët en poultr hac en ludu tout nemert an esquern,  
Ha nimp a yelo ive ; hep donet d'hon espern,  
Ar maro evel eur filout a deuo d'hon zromplan,  
Hac hon c'haso gantan pa sonjfomp neubetan.

A nep neuz gret ar wers-man a zo baz a speret,  
He haño scrivet mad Herve-Job AR BROZEC,  
Eun den en perfection a langaj brezonec,  
Hac a zo e chom en parous Perros-Guirec.

